

Soñjal a ran en un niver...



**1 Problem:** Faotañ a ra da Dad-kozh lodenniñ 30 madig etre e 4 bugel-bihan. Petra e vo dav dezhañ ober?

Setu amañ diskroumoù Melani, Bastian ha Sisilia.  
Kelc'h ar respont(où) mat.  
Abalamour da betra n'eo ket mat ar respont(où) all?

8 8 7 7

Roet e vo 8 madig da zaoz ugel ha 7 d'an daou all.

Melani

5 5 5 5 → 20  
1 1 1 1 → 4  
1 1 1 1 → 4  
28

Roet e vo 7 madig da bep bugel ha chom a raio 2 gant Tad-kozh.

Bastian

N'emañ ket 30 e taolenn dre 4

4 gwezh 6, 24  
4 gwezh 7, 28  
~~4 gwezh 8, 32~~  
30 - 28 = 2

Roet e vo 7 madig da bep bugel met ret e vo da Dad-kozh mirout 2.

Sisilia

**2** *Problemoù da ziskloumañ war da gaien*

Respont (sevel ur chema a c'helli ober, pe skrivañ ur gevatalenn pe displegañ da respont).

- 1 ▶ Er stal-levrioù he deus prenet Paola 4 skeudenn nevez. 32 skeudenn he deus bremañ.  
Pet skeudenn he doa Paola a-raok bezañ bet er stal-levrioù?
- 2 ▶ Ur voestad 25 kreion-feltr a zo gant rener ur skol. Dasparzhet e vint etre an 3 c'hlasad a zo er skol.  
Pet kreion-feltr a yelo gant pep klasad?  
Ha chom a raio kreionoù-feltr c'hoazh?
- 3 ▶ Pet ui a ya d'ober 43 boestad 12 ui pep hini?
- 4 ▶ Pet abid sport 50 € a c'heller prenañ evit 310 €? Ha chom a rafe arc'hant goude-se?
- 5 ▶ Un alpinist a zo krog da grapat gant ur serzhenn 107 metrad uhelder. Savet eo war 14 metrad betek-henn.  
War bet metrad e vo dav dezhañ krapat c'hoazh?
- 6 ▶ O sevel ur bern 11 tamm sukr emañ Fañch. Emañ Brewal o sevel ur bern 7 tamm sukr.  
Pet tamm sukr a vefe dav da Fañch roiñ da Vrewal evit ma vefe an eil bern ken uhel hag egile?